

Ur ger a-raok...

Alies a-walc’h e vez graet eus an *heroic fantasy* un islennegezh. Termenet e voe gant ar romantour Lin Carter a lakae evel diazez an *heroic fantasy* avanturioù kentañ *Conan of Cimmera* gant Robert E. Howard. Ar pezh a veze graet “romantoù tigar” anezhe a grogas da vezañ diouzh ar c’hiz er bloavezhioù 1960-70. Lâret e veze diwar o fenn e oant romantoù evit krennarded, leun a glichedoù hag e-lec’h ma heulied harozed kigennek ha gourelour oc’h en em gannañ a-enep da erevent pe grouadurioù drougavizus all, ha bep tro en un doare manikean da welet ar bed. Ar c’hevredigezhioù-se, taolennet evel reoù eus ar Grennamzer, a vez alies kozh-Noe. Enno e kaver hudouriezh ha sorserezh evit gwir kement hag ar c’hrouadurioù evel unkorneged, erevent, morganezed pe c’hoazh boudiged.

Ken gwir ha faos eo. Rak an testennoù kentañ a oa skrivet alies gant tud yaouank evit kelaouennoù krouet evit tizhout lennerien nevez (ar grennarded) gant frejoù moullañ dister, a groge da vezañ diouzh ar c’hiz d’ar mare-se.

Hogen ma seller a-dostoc’h e verzer e oa dedennet an dud gant ar fantazi a-bell amzer. Klotañ a ra gant un ezhomm en deus bet Mab-den a-viskoazh : an hunvre hag ar c’hest avanturour. An ezhomm-se a vez adkavet er mitologiezhioù kozh evel e-barzh avanturioù Herakles (gresian-roman) pe reoù Gilgamesh (sumerian) pe c’hoazh e kurioù skandinaviat (saga) ha tostoc’h ouzhip er c’helc’hiad arzhuriek pe en Imram keltiek. Anat eo e voe diazezet an danevelloù kentañ war un hir a hengoun dre gomz bet adstummet evit ur c’hevredig nevez (XII^{vet} kantved) : hini ar c’hestell hag al lezioù, evel Istor Rouaned Breizh (*Historia Regum Britanniae*) gant Geoffroy de Monmouth pe c’hoazh *Romant Horn* skrivet gant un den dianv angl-ha-normand war-dro 1170. Ne voe ehan ebet d’ar romantoù ha gwerzioù-se a-hed an istor, dindan stumm romantoù marc’heien pe gourtes en XVIII^{vet} ha XIX^{vet} kantved. Ul lusk nevez a voe dezhe pa voe adkavet hengoun dre gomz sevenadurioù kozh dispriziet betek-henn ha lakaet dre skrid, evel Osian gant ar Skosad MacPherson (1760) pe c’hoazh *Kalevala* ar Finnad Elias Lönnrot (1835). Pinvidikaet e voe c’hoazh gant al lusk “folklorour” ha diorren oberennoù barzhoniezh ha delvelour evel reoù William Morris ha Burne Jones war-dro 1860.

Ar meurgan hag ar c’hur a zo perzhioù pennañ ar fantazi gouronnel (*heroic fantasy*). Damwir eo ar bedoù-se alies, mesket gant daveoù fantaziek ha marzhus. Un Istor a zo d’ar bedoù-se, ur mitologiezh hag ur gevredigezh neuze ; liesmilvedel int. En holl destennoù-se e kaver traoù boutin : n’eus ket a deknologiezhioù nevez, krennamzerel eo an endro, kaeraet e vez an Natur gouez, ha krouadurioù mojennel a vez adkavet enne. Alies int danevelloù deskoni ma rank an haroz (an harozed) en em anavezout, mont war-raok, dont da vezañ tud “deuet” a-drugarez pe a-gaoz d’an avanturioù bevet gante.

Ur blanedenn guzh, diskuliet er fin, a zo d’an haroz evel e-barzh kalz a gontadennoù pobl, ar pezh a vez anvet “gwellzarvoud” (*eucatastrophe*) gant J.R.R. Tolkien, da lâret eo un dibenn eürus, lec’h m’eo ar c’hlasker-bara mab ar Roue, an emzivadez un hêrez d’ur rouantelezh laeret. Gant se e c’haller lâret e klot mat ar fantazi gant ar c’hontadennoù klasel.

An darn vrasañ eus an istorioù-se a vez dalc’het en ur prantad eus istor ar bed termenet evel “teñval” (*dark age*), goude un oadvezh aour distrujet gant an droug hag ar breinadur a stourm oute an haroz a-benn adkavout un oadvezh a heson. Ne vez ket kontet obererezhioù ar brasañ niver (pe nebeut-tre) met kentoc’h reoù hiniennel hag harozek evit lakaat al lenner da anavezout gwelloc’h bed an istor. Kenlabourat a ra an haroz gant tud eus pobloù disheñvel (pe c’hoazh spesoù, rummadoù...), lakaat a reont a-gostez o mennozhioù disheñvel evit kenstrivañ davet ur pal a ya dreist d’o disheñvelerioù. Adkavet e vez enne an holl zoareoù hunvredik kozh da gontañ, evel ar merzher youlek, ar garantez dibosupl (rummad pe spesad), obererezhioù diemgar ha dic’hoanag, sekredoù kuzhet mat ha diskuliet, tud galloudus breinet ha drouk. An haroz, pe an harozed, a stourm bepred a-enep da dud galloudusoc’h evitañ, ar gwikadelloù a vez bepred digemeradus (er penn-kentañ). Ma klot an holl glichedoù-se gant stereotipoù (a seblant hegreidik evit reoù zo) ez eo peogwir ec’h adkaver reoù ar bugaleaj : ar vrokusted, ar c’hoant justis, an ober hiniennel hag un doare “romantelezh” betek re, a-raok dont da vezañ gour ha kregiñ da glotaat gant ur spered reolatet, hini hor gevredigezh lintret, modern, luziet ha greantel e-lec’h ma soñj d’an holl ac’hanomp ne c’haller ket kaout an disterañ levezon war hon tonkadur.



Gwriziennoù an Atlas-mañ a zo ma lennadennoù kentañ er bloavezhioù 1980, al levrioù godell-se ma kaved enne kartennoù er penn-kentañ pe er penn-diwezhañ ha ne sikourent ket evit heuliañ red an istor. Ganet eo ar mennozh-se er santimant bezañ laeret abalamour d'ar c'hartennoù-se, re vihan alies pa ne oant ket divalav-tout.

Ouzhpenn-se, piv n'en deus ket, pa oa bihan, klasket sevel ur gartenn eus ur bed ijinet, ha mont betek tanañ ar bordoù evit ma rafe gwiroc'h ha koshoc'h war un dro ? Graet e veze an dra-se er fin-tout evel-just, en ur gemer ar riskl da foeltrañ al labour graet gant kement a ked, o strivañ evit mestroniañ ar bluenn hag al liv, ken ma teue er-maez ma zeod e-keit ma leunien ar paper gant pokardoù ha kaoc'h-kelien.

Rak anat eo : kartenn ur "bed fantazi" a rank bezañ treset gant an dorn. Ar

menezioù hag ar c'hoadoù a rank bezañ heñvel ouzh... menezioù ha koadoù, hag e ranker gwelet ar c'hestell hag an erevent ivez.

Ar pezh a zo bet graet el levr-mañ, en ur gemer harp ouzh stil skeudennadurezh kement aozer kinniget.

Un abeg all d'an Atlas-mañ a zo ma mignoniezh gant Olivier Clainche, tik eñ ivez gant al lennegezh-se. Gantañ hor boa raktreset aozañ Atlas ar Bedoù Faltaziet, e-lec'h m'hor bije adkavet Kreizdouar J. R. R. Tolkien kement hag enezenn an Atlantis pe c'hoazh hini Utopia ijinet gant Thomas Moore. Aet eo Olivier, evel ur marc'heg kadarn o stourm evit ur bed n'eo ket ijinet met gwir anezhañ, ha pa vefe un tamm utopiezh ennañ, hini Rojava er C'hurdistan. Evitañ eo, e-touez abegoù all, on bet betek penn al labour-se.

Kristian Goindin



*** ha me ivez !



Pa oan o skrivañ ma eil romant – hag eñ doare *heroic fantasy* – em boa bet ezhomm tresañ ur gartenn evit heuliañ gwelloc’h an tudennoù kement hag evit an awen. N’eus ket un tresour ac’hanon, pell a se, ha ne dalveze mann din klask tanañ bordoù ar paper, met anavezout a raen pec’hedig Kristian ha goulennet em boa digantañ reiñ stumm d’ar gartenn-se ha buhez da’m zudennoù.

E-kerzh al labour-se hon eus komzet kalzik eus al lennegezh, eus ar fantazi gouronnel, ha neuze eus e raktres Atlas n’en doa ket gallet mont betek penn anezhañ. Barrekoc’h evitañ e oan war ar brezhoneg, ha ken tik hag eñ gant seurt lennegezh, setu m’en doa goulennet ganin kemer perzh el labour-se.

Etre daou e oan er penn-kentañ. Ret e oa din echuiñ ma romant ha ne ouien ket re peseurt hini a vefe ma flas er raktres, hep kemer hini Olivier. Met aes eo bezañ kaset gant hunvreoù Kristian hag hep gouzout deoc’h e kemerit perzh e kentañ nouspetvet festival an Arzoù Digempoell... e-touez traoù all !

An hir a zivizoù, an eskemmoù, a gase ac’hanomp d’an eil danvez d’egile, met bepred e teuemp en-dro d’un dra : al levrioù. Mod pe vod ez eus traoù boutin etrezomp, hon tier a zo leun a levrioù, hor pennoù a zo leun gant ar memes krouadurioù, ar memes

avanturioù. Disheñvel eo hor santadurioù evel-just, hor preder, hon darempred gant ar skridoù fantazi, da gentañ peogwir n’hon eus ket lennet anezhe er memes mare. Pa oa-eñ o lenn e romantoù kentañ e oan-me o teskiñ lenn nemetken. Un dek vloaz bennak a zale am boa !

Ha kavet ’m eus ma flas a-benn ar fin. Evit an Atlas-mañ em eus lennet skrivagnerien ne ’m boa lennet gwech ebet c’hoazh, ha Kristian e-unan en deus graet anaoudegezh gant reoù all em boa prestet o levrioù dezhañ. Ne vo ket gwelet an Atlantis, ha lod a gavo dezhe e vank ar skrivagner-mañ ’r skrivagnerez hag ar gwir a vo gante.

Ar pezh hon eus bet c’hoant d’ober gant an Atlas-mañ eo diskouez emdroadur ar rumm lennegel-se hervezomp. Lakaet hon eus war wel ar skrivagnerien hag ar skrivagnerezed heverkañ dre o stil evel-just kement ha dre o zro-spered, ar re o deus lakaet – evidomp – ar fantazi gouronnel da vezañ ken pouezus ; hag ar re a gendalc’h da lakaat ar rumm-se da emdreñ, dre o ijin hag o mennozhioù.

Rak ne vo fin ebet d’ar c’hontadennoù fantazi-se. Ul lodenn ac’hanomp int, droug pe vad a ra deomp, peogwir int hol lodenn a hunvre. Hag an holl a oar an dra-se : en hunvreoù eo e kuzher alies hor gwirionez.

Jerom Olivry

Robert E. Howard



anet e oa bet Rober E. Howard e 1906 e Peaster, en Texas. Mab nemetañ ur medisin e oa hag abred-tre e krogas da lenn. Gant e vamm e voe sachet war-zu ar skrivañ.

Da 15 vloaz e klaskas lakaat embann e zanevelloù e-barzh kelaouennoù *pulps*, ken niverus d'ar mare-se hag eñ sot-pitilh gante.


Pa oa 19 vloaz, e 1925, e voe embannet e zanevell gentañ, *Spear and Fang*, er gelaouenn mil anavezet *Weird Tales* (a oa ivez embanner, e-touez reoù all, Ashton Smith ha Lovecraft).

Skrivagner puilh anezhañ, Robert E. Howard a voe gwelet en holl gelaouennoù meur goude-se, o kemer e dro eus ganedigezh ar *c'homics* kentañ (*Weird Tales*, *Argosy*, *Top Notch*...) hag ur c'hevredig nevez



a groge an embannerien da vezañ dedennet gante : ar re yaouank. Krouiñ a reas meur a dudenn ardamezus evit ar c'helaouennoù-se a veze gwerzhnet ur mann : Cormac Mac Art, Solomon Kane, Kull ar roue barbar... ha Conan of Cimmeria evel-just. Klotañ a rae mat-tre an holl harozed-se gant ar stil grafek nevez a veze gwelet o vleuniañ d'ar mare-se hag a yae a-enep talvoudoù an “Amerika Tadig”. Ar grennarded disuj a blije dezhe gwelet korfoù en noazh revelaet, an emzalc'h garv, ha plijet ivez o welet ar barbar (*Hero*) o stourm ouzh ur gevredigezh taolennet evel breinet ha vil, evel e-barzh *Tarzan* gant Edgar Rice Burroughs.

E 1936, hag eñ 30 vloaz nemetken, e oa e barr e arz (ouzhpenn 500 danevell, 2 romant...) met en em zistruj a reas goude bezañ gouezet ne zihunfe ket e vamm a oa er c'homa.




Er bloavezhioù 1950 eo e reas berzh e dudenn Conan, a-drugarez da Lyon Sprague de Camp, skrivagner etre, falser lennegel, sot-nay gant ar fantazi ha dreist-holl ur mailh war ar c'hehentiñ ha war merañ ar “gwirioù skrivagner”.

Dalif ec'h embannas kazi holl zanevelloù *Conan* lakaet war gont Howard. Alies e voent adaozet, troc'het, adskrivet. Lâret a rae en doa kavet anezhe e dielloù ar gelaouenn *Weird Tales* pa oa-eñ rener an embann du-se (ar memes tra a reas gant Lovecraft ivez da skouer). Kemeret en deus e dro, dreist-holl, eus ar bloavezhioù-se ma oa puilh an oberennoù fantazi : 1954, *Lord of the Rings* gant Tolkien ; 1957, oberennoù Lin Carter ; 1958, Moorcock ; 1960, Jack Vance... hag a-benn ar fin en doa kemeret e dro eus ganedigezh al levr godell.

Er bloavezhioù 1960-70 eo e vleunias tudenn Conan, ikonenn ar skeudennourien yaouank hag ar c'helaouennoù nevez gouestlet d'an arzoù grafek, an holl anezhe bouetet gant ar *pulps* hag ar *c'homics* : Frazetta, Boris Vallero, Siudmak, Moebius, Casa, Woodroffe...



Kêriadenn geviat e norzh Ataru



Kartenn Hyboria

Ne gaver nemet ur gartenn eus Hyboria ha ne voe ket treset gant Robert E. Howard met gant P. Schuyler, embannet e 1950 (da lâret eo 14 vloaz goude marv an aozer). Ne oa ket gwall vrav, ha graet evit levrioù godell. Gallet en dije sevel anezhi a-drugarez da Sprague de Camp en dije kavet danevelloù gant notennoù Howard, ar pezh a lakaas anezhañ da embann 8 dastumad ouzhpenn (eus 4 da 12 dastumad en holl) evit kelaouennoù evel *Weird Tales*, *Argosy*, ha *Top Notch*, an holl anezhe perc'hennet gant Sprague de Camp. Hervez hemañ diwezhañ e voe ijinet gant Howard ur seurt istor eus bed Conan, gant an douaroniezh, etnologiezh hag an disrannoù politikel splann : an oadvezh hyborian.

War-dro 12 000 vloaz a-raok hon oadvezh e voe staliet an istor, just a-raok ar skornadur bras a voe goloet gantañ an hanterzouar norzh. D'ar mare-se e oa staliet ar rouantelezh hyborian e kornôg ar c'hevandir pennañ, lodennet en un toullad Stadoù krouet gant alouberien deuet eus an norzh. E su ar rouantelezhioù-se e oa ar C'heodedoù-Stad Shem ha c'hoazh pelloc'h er su e kaved ar rouantelezh kozh ha skrijus anvet Stygia. En ur genderc'hel da ziskenn, goude un dezerzh divent e kaved ar Rouantelezhioù du. Er reter, goude ar mor Vilayet, e oa staliet ar rouantelezh Hyrkanian hag er reter pellañ ar gêrbenn gevrinus Khitaï.

Ne gaver ket kalz a ditour douaroniezh na kalz a zeskrivadurioù en ur lenn avanturioù Conan. Ar pezh n'eo ket souezhus pa ouier ez eus kaoz eus danevelloù bihan, war-dro 20-30 pajenn anezhe, e-lec'h ma oa ret dezhañ diorren un itrik, dibunañ un istor hag er fin pakañ ar briñsez koant.

Ar pezh hon eus desket en ur lenn an danevelloù eo e oa bras-divent ar menezioù, don-tre ha teñval an islonkoù, kevrinus ha didreuzus ar c'hoadeier...



Ar gartenn kinniget ganimp a laka war wel lodenn gornôg ar c'hevandir bras, e-lec'h ma vez dalc'het istor ar pevar dastumad kentañ. Merket eo bet ar rouantelezhioù pennañ hag ar c'heodedoù/kêrioù ma tremen Conan e-kerzh e avanturioù. Ma kemeromp e kont labour Sprague de Camp e vefe plaset ar mor kreizdouar e-lec'h ma weler menez an tan hag e genoù ar stêr-veur Stiks. E traoñ dezhi e vefe an Nil hag ar mor Vilayet a zeufe da vezañ ar mor Kaspia.

Merket eo bet gant ur pik ruz ar gêriadenn m'eo ganet Conan hag ouzhpennet hon eus stêrioù zo evit ma vefe poellekoc'h ha boueta ar stêrioù bageadus pennañ, ar stêr Shrind hag an Argos, a vez kavet andon o mammenn en norzh, er morskornegoù divent. Spi zo hon eus dalc'het d'an dra bouezusañ : ar menezioù bras-divent, an islonkoù don, ar c'hoadoù didreuzus...




J.R.R. Tolkien



Ganet e oa bet John Ronald Renel Tolkien e 1892 e Bloemfontein (Afrika ar Su) a-raok dont gant e familh da Vro-Saoz en-dro e 1895, goude marv e dad. Mervel a reas e vamm pa oa 12 vloaz, ha, deuet da vezañ emzivad, e voe kaset d'ur skol gristen, e-lec'h ma krogas da lenn kalzik kontadennoù, mojennoù, danevelloù mitologiek ha kurioù arzhuriek a blije kement dezhañ. Buan e voe plijet gant ar yezhoù kozh ha c'hoari a rae oc'h ijinañ e re dezhañ e-unan.

Ober a reas anaoudegezh gant ar finneg en ur lenn ar *C'halevala*, kur mitologiek henfinneg, ha dedennet e voe gant an angl-ha-saoz, an henislandeg, an henskoteg. Heuliañ a reas studioù war al lennegezh hag al lizheregouriezh kozh e Oxford, met ret e voe dezhañ chom a-sav abalamour d'ar Brezel-bed Kentañ (koll a reas meur a vignon



eus ar c'hlub lennegel a oa bet savet en Oxford). Gloazet e voe e 1916 ha distreiñ a reas d'ar vro evit kenderc'hel gant e studioù e Oxford.

Da gentañ e kavas ur post e Leed hag en Oxford da c'houde e-lec'h ma voe kelenner war al lennegezh saoz (etre 1925 ha 1959).


E 1937 e voe embannet *The Hobbit*, deuet da vezañ klasel el lennegezh evit ar re yaouank. Skrivet e oa bet da gentañ evit e vugale, ha broudet e voe gant e embanner da skrivañ an drilogiezh *The Lord of the Rings* a voe embannet e 1954-55 nemetken.

An daou romant-mañ a vez dalc'het an istor en ur bed bet ijinet gantañ adalek ar bloavezhioù 1916-17. Krouet en doa ur vitologiezh tro-dro d'ar yezhoù ijinet gantañ en ur gemer harp war ar c'hembraeg evit ar "Sindarin", an henislandeg evit an "Adûnaic" hag ar finneg evit ar

“Quenya” ... al lizheregour anezhañ a savas istor ar yezhoù-se hag a-hed e vuhez e cheñchas pe e lakaas da glotañ an istorioù-se evit ma vefent an tostañ posupl eus ar yezhoù a oa bet ijinet gantañ en e yaouankiz, da lâret eo evit ma vefent fonek-tre, evit ma klotfe sonerezh ar ger gant ar pezh a vez komzet diwar e benn. Da skouer : « Alkaraxë » a dalvez kement hag « Ar skorn o skrijal ».

Pa varvas e 1973 e voe klokaet gant e vab *The Silmarillon*, a oa bet nac’het gant e embannerien, gant an aon e vefe c’hoazh ur c’hur keltiek ne oa ket gwall sot gante al lennerien saoz ha peogwir ne zegase ket kalz a nevezenti ha chouk e oa gant un ijin faltaziek betek re ha digomprenus. Abalamour da se en doa kroget un istor all, deuet da vezañ *The Lord of the Rings*.

Un Istor a 300 000 vloaz a oa bet savet gant Tolkien ha ne oa ket echu gant e labour pa varvas. E gwirionez e vefe bet gwelloc’h dezhañ sevel un dornad romantou, kontadennoù, barzhonegoù, kanoù... e-lec’h sevel un istor hepken. Kement skrid a vije bet ur perzh eus ar bed kozh-se : kur *The Children of Húrin*, *The Lays of Beleriand*, barzhoneg *Beren and Lúthien*, an *Ambarkanta*... An testennoù-se a voe embannet goude e 12 levrenn (*The Book of Lost Tales*, *Unfinished Tales*...) ha n’eus nemet 6 anezhe a zo bet embannet e galleg.



An emgann dizehan etre ar galloudoù (Valar) evit al levezon war ar bed (Arda) a vez kontet enne. Meur a bobl a vez adkavet en istor oc’h en em gannañ : an dud, an elfed, ar gorred, an hobbited ha krouadurioù all evel an orked hag an drolled (gwir bimpatrom ar c’hrouadurioù drougoberius).

Ma vezer tapet ken aes ha tra gant an danevelliñ ez eo sur a-walc’h peogwir ec’h implij ar skrivagner brastresoù ha mojennoù anavezet-tre, kement ha peogwir ez eo denel-tre e dudennoù, o tifenn o frank-diviz ha mont a-enep da hollveliegezh hag aotrouniezh an droug.

Ur bed e-lec’h ma n’eus kazi tamm ardivink pe wikefre ebet (pe evit servijout an droug hag an distruj ; ar pezh a zeu sur a-walc’h eus ar pezh a vevas e-kerzh ar Brezel-bed Kentañ) eo ar bed-se. Ret eo kaout soñj ivez e voe unan eus ar re gentañ oc’h emezelañ ar *British Ecological Society* e 1913 hag a-hed e vuhez e welas an endro o vezañ distrujet evit gounid ar gevredigezh c’hreantel.

Meur a wech e voe azasaet oberenn Tolkien, ha n’eus nemet er sinema e voe talvoudus (*The Lord of the Ring*, 2001-2003 ; *The Hobbit*, 2012-2014).

Diwar-benn kartennoù ar C’hreizdouar

Kalzik a gartennoù a gaver eus ar C’hreizdouar. Reoù sirius-tre, reoù all faltazius da vat, met ret eo kaout soñj ne oa bet treset nemet div gartenn gant ar skrivagner. Ha c’hoazh ne oa nemet raktresoù anezhe. An hini gentañ, hini ar Beleriand (oadvezh kentañ) a oa bet treset gant ur c’hreion gris war un arnodenn skol-veur ha kement a notennoù zo ken e teu da vezañ dilennapl. An eil, bet treset evit *The Lord of the Rings* a zo ar memes tra. An div gartenn-se a zo bet adaptet gant e vab Christopher. An dra nemetañ a zo bet treset reizh eo kartenn ar Menez E-unan evit *The Hobbit* e-lec’h ma vez kavet an nor guzh hag un destenn vihan e runoù.

Dibabet hon eus neuze labourat gant meur a darzh evit an Atlas-mañ : ar re meneget a-us, met ivez testennoù an aozer e-unan, an *Ambarkanta* en o zouez, *The Book of Lost Tales*, testennoù marvailhus awenet gant an douaroniourien gentañ, evel Parthënius, Diódôros Sikeliôtès, Timaghénēs pe c’hoazh O Poseidônios o Apameús, da lâret eo etre an eil hag ar c’hentañ kantved a-raok Jezuz-Krist. An testennoù-se a zeskriv lec’hioù disheñvel eus hor bed anavezet neuze : ar stêrioù, ar menezioù, ar pobloù, an hedoù... Awenet e voe Tolkien gant an testennoù-se evit skrivañ « Un deskrivadur eus Enez-Númenorë » (eil oadvezh) e-barzh *Unfinished Tales*.

Un tarz all hon eus implijet amañ : ar c’hartennoù bet treset gant Christopher Tolkien, unan evit ar *Silmarillion* en o zouez, e-lec’h ma adapt notennoù e dad ha merkañ a ra e ruz al lec’hioù ma vez adkavet an tudennoù pennañ (an elfed). Pouezus eo kaout soñj eus ar stil bet implijet gant Christopher evit tresañ e gartennoù, awenet gant kartenn *The Hobbit* : treset e vez ar gwez hag ar menezioù e diarsell diwar varc’h ha skeudet, ar pezh a zeuio da vezañ pimpatrom kazi holl gartennoù ar fantazi gouronell.

An tarz diwezhañ implijet ganimp eo al labour divent kaset da benn gant an douarourez amerikan Karen Fonstad e 1972. Implijout a ra-hi an holl destennoù embannet ha notennoù ar skrivagner (12 levrenn en holl). Ar pep talvoudusañ evidomp eo al labour war an hedoù hag ar c’henfeurioù gwirvoudel. Al labour gwellañ eo he hini e-touez an holl re bet savet war ar C’hreizdouar. Diskouezet en deus pegen pizh ha kempoell e oa Tolkien a-fet douarouriezh, torosennadur, hin, struj, poblidigezh...

Implijet hon eus ivez levrioù ar skrivagner evel-just. Rak puilh eo an deskrivadurioù enne ha ma vez tapet ken buan al lenner en istor ez eo peogwir eo ken klok ar bed deskrivet ken ma c’haller krediñ ennañ : ar stêrioù a red davet ar plaenennoù, kelc’hiad ar c’houlzoù-amzer hag an amzerelezh dre vras a zo ken poellek ma c’haller ijinañ ez eus eus ar bed-se.



Kartenn ar C'hreizdouar

(I^{añ} oadvezh)

Gwelet e vez war ar gartenn-mañ tu kornôg ar C'hreizdouar en e gentañ oadvezh. Al lec'h ma vez dalc'het eil lodenn ar *Silmarillion* eo, pe evit bezañ resisoc'h « The War of the Jewels ». Lec'hiet eo e kornôg ar menezioù glas, gwir voger-difenn hag a ra an harz gant an Eriador er reter, hag e reter ar mor bras a gas d'ar Valinor (bro an doueed). Graet e vez Beleriand eus al lodenn-se eus ar C'hreizdouar, anvet Broceliand e raktresoù kentañ Tolkien (*The Book of Lost Tales*), d'ar mare awenet gant ar c'hur arzhuriek ma ne oa kazi nemet koadoù e-kreiz, miret goude gant an Doriath (ar vro gloz).

Ar c'horn-bro bras-se a zo lodennet e daou (reter ha kornôg) gant ar stêr-veur Sirion. Awenet omp bet evit ar gartenn-mañ gant an hini treset gant Christopher Tolkien evit embannadur kentañ

ar *Silmarillion*, e-lec'h m'en doa merket e ruz rouantezhioù pennañ an elfed, lakaet ur steredennig el lec'hioù ma ya mibien Fëanor (Noldor).

Troet hon eus an anvioù-lec'h pa c'hallemp (diwar an elfeg), war-bouez anvioù ar stêrioù evit chom poellek gant an istor hag ar benndudenn Ulmo (doue an dourioù).

Lakaet hon eus ivez div gêr bennañ ar gorred war lodenn reter ar menezioù glas (Belegost, anvet a-raok Ost Belegost ; ha Nogrod, muioc'h er su, an div bet skrivet e Khuzdul, pe gorreg : Gabil Gathol, « Ar c'hreñv-lec'h bras », ha Tumun Zahar, « Ar mougevioù don ») rak, evel ma lâras Tolkien e-kerzh un atersadenn war ar BBC e 1953 : « Dister eo ar gorred ha ret e vo reiñ muioc'h a bouez dezhe. »

Aet omp un tamm pelloc'h ivez en norzh (ar menezioù houarn) hag er su (Taur-im-Duinath).



Gabil Gathol dindan ar menez Dolm